

Ar bleiz zo deuet en-dro !

Azasaat : Goulc'han Kervella – Ar Vro Bagan

Diviz 1

Emañ ar vamm lapin o vont da gousket.

Mamm Lapin — Mont a ran da lenn ar gazetenn a-raok mont da gousket !

Disklaviñ a ra. Kemer ar gazetenn da lenn, spontet eo.

Mamm Lapin — Spontus eo ! Ar bleiz zo deuet en-dro ! Buan, prenañ mat an nor.

Mont a ra da brennañ an nor. Dont a ra en-dro. Trouz ouzh an nor.

Dao ! Dao ! Dao !

Mamm Lapin — O va Doue... Ar bleiz eo moarvat.

Mont a ra da selaou e-kichen an nor.

An tri femoc'h — Digor ! Digor buan ! Hastañ buan 'ta !

Mamm Lapin — Piv zo aze ?


An tri femoc'h — An tri femoc'h bihan an hini eo. Mar plij, Mamm Lapin, laosk ac'hanomp da vont en ti ! Spontet bras omp. Ar bleiz zo deuet en-dro !

Mamm Lapin (*en ur zigeriñ an nor*) — Deuit-tre va mignoned. Deuit e-barzh an ti.

Dont a reont en ti.

An tri femoc'h — Trugarez vras, Mamm Lapin !

Mont a reont da azezañ e-kichen an oaled.



« Naon du am eus », eme ar bleiz, a zo o paouez dont en-dro.

Diviz 2

Trouz ouzh an nor.

Dao ! Dao ! Dao !

An tri femoc'h (*ar gazetenn ganto*) — Aou, aou, aou ! Ar bleiz ! Ar bleiz ! Erru eo ar bleiz !

Mont a reont da guzhat a-dreñv ar c'hadorioù.

Mamm Lapin (*e-kichen an nor*) — Piv a zo aze ?

Gavrig (*ar gazetenn ganti*) — Me eo, an itron Gavrig, gant va mended.

Ar vamm a zamzigor an nor.

Gavrig — Deuet omp amañ da glask repu.

Ar menned — Da glask repu !

Gavrig — 'Peus ket klevet ar c'heloù skrijus ?

Ar menned — Ar c'heloù skrijus !

Gavrig — Ar bleiz zo deuet en-dro.

Ar menned — Ar bleiz zo deuet en-dro !

An tri femoc'h — Ar bleiz zo deuet en-dro !

Mamm Lapin — Deus en ti, va mignonez kaezh. Deus e-barzh gant da re vihan.

Gavrig hag ar menned — Trugarez vras, Mamm Lapin.

Mont a reont da azezañ gant an tri femoc'h.

Diviz 3

Trouz ouzh an nor.

Dao ! Dao ! Dao !

Gavrig hag an tri femoc'h — Ar bleiz, ar bleiz ! Erru eo ar bleiz !

Mamm Lapin — Piv zo aze ?

An oan (*ar gazetenn gantañ*) — Me eo, an oanig bihan.

An holl — An oanig bihan eo !

An oan — E foennog ar stank edon oc'h evañ dour. N'on ket evit mont d'ar gêr ken. Deuet eo ar bleiz en-dro.

Ar re all — Deuet eo ar bleiz en-dro !

Mamm Lapin (*en ur zigeriñ an nor*) — Deus buan e-barzh an ti, oanig bihan. Deus da dommañ e-kichen an tan !

An oan — Trugarez vras dit, Mamm Lapin !

Mont a ra da azezañ gant ar re all.

Diviz 4

Trouz ouzh an nor.

Dao ! Dao ! Dao !

An holl — Erru eo ar bleiz !

Mamm Lapin — Piv zo aze ?

Pêrig — Me eo, Pêrig eo !


An holl — Pêrig eo !

Ar vamm a zigor an nor.

Pêrig — N'em eus ket sentet ouzh Tad-Kozh. Emaon o vont da chaseal. Da chaseal piv, a gav deoc'h ?

Ar re all — Ar bleiz moarvat.

Pêrig — Gwilhou ar bleiz ! Klevet peus ar c'heloù ? Deuet eo ar bleiz en-dro !



« Spontet bras on », eme unan eus an tri femoc'h.

Ar re all — Deuet eo ar bleiz en-dro !

Pêrig — Daoust ha pelec'h emañ ?

Ar re all — N'emañ ket amañ, yañtao.

Mamm Lapin — 'Michañs ne deui ket amañ !

Ar re all — A-hend-all e vezimp debret gantañ.

Pêrig — Arabat kaout aon. Me a raio e stal outañ gant va fuzuilh.

Ober tro al leurenn gant e fuzuilh.

Ar re all — Brav, brav eo Pêrig !

Mont a ra da azezañ gant ar re all.

Diviz 5

Trouz ouzh an nor.

Dao ! Dao ! Dao !

Mamm Lapin — Piv eo ?

Pêrig — Ar bleiz eo kredapl-bras...

Ar re all (*o vont da guzhat*) — Ar bleiz !


Mouezh Kabellig Ruz — Me eo, Kabellig Ruz.

Ar re all — Kabellig Ruz eo !

Digeriñ an nor.

Kabellig Ruz — Mont a ra mat ganit ? Krampouezh am eus degaset dit. Hag ur podadig amann. Heum ! Pegen mat e vezo...

Ar re all — Arabat dit chom da vale er c'hoad bras ! Deuet eo ar bleiz en-dro !



« Me a raio e stal ouzh ar bleiz gant va fuzuilh », eme Pêrig.

Kabellig Ruz — Deuet eo ar bleiz en-dro ?

Pêrig a zeu e-kichen.

Pêrig — Arabat kaout aon ! Difenn a rin ac'hanout, va dousig.

Mont a reont da azezañ e-kichen an tan.

Diviz 6

Mamm Lapin — Ma, diwezhat eo dija. Poent eo aozañ koan. Lakomp an daol.

Kabellig Ruz — Lakomp pep a gador.

Pemoc'h 1 — An doubier war an daol.

Pemoc'h 2 — Pep a asied.

Pemoc'h 3 — Pep a werenn.

Gavrig — Pep a loa.

An oan — Pep a fourchetezenn.

Pêrig — Pep a gontell.

Kabellig Ruz — Bara da zebriñ ha dour da evañ.

Diviz 7

Trouz er-maez.

Baoñ, baoñ, baoñ !

An holl — Piv zo aze 'ta ? N'emaomp ket o c'hortoz tud ! O c'hortoz den ebet ken !

Mouezh ar bleiz — Ar bleiz an hini eo !

An holl — Ar bleiz !

Ar bleiz (*dont a ra e-barzh*) — Ar bleiz drouk on-me. Du on gant an naon. Amañ ez eus kig, a welan...

Ar re all — Amañ 'z eus kig ! Amañ 'z eus fars ! Amañ ez eus kig ha fars !


An holl a lamm warnañ hag a stag anezhañ.

Kabellig Ruz — Bleiz, n'hon eus ket aon razout ken !

An holl — Bleiz, n'hon eus ket aon razout ken !

Kabellig Ruz — Ma vezez fur ha ma kontez deomp istorioù bleizi spontus e vezi pedet da chom da goan.

An oan — A-hent-all e vo graet stripoù gant da vouzelloù !



« N'hon eus ket aon rak ar bleiz ken »,
eme Kabellig Ruz.

Gavrig — Ha gant da groc'hen ur sac'h biniou !

Ar bleiz — Stripoù ha biniou ?!!! Fur e vezin, hen touiñ a ran !

Mamm Lapin — Boued war an daol !

Ar re all — Soubenn al legumaj ! Karotez ! Patatez ! Saladenn ! Pour ! Avaloù ! Per ! Krampouezh lardet gant amann !

Ar bleiz — N'eus ket kig da zebriñ ?

Ar re all (*en ur ganañ*) — Tamm kig ebet ! Fars tout !

Diroll a reont da c'hoarzhin o welet pegen dipitet eo ar bleiz. ■